

M. Levan a' approuvez / M. Lebrigue



2. 5. 2, HISTOAR ADMIRABL

A VUEZ

SANTEZ HELENA.

Par ton YAN GUERIN.

C. G. R. M.

**B**REMA e fel din discleria  
Ar vuez Santez Helena:  
Bezit attantif d'e c'hêvet,  
Ho calon sur a vezo touchet.

Clêvet a refot he buez  
Carget eus a dristidigez,  
Hag ar martir e deveus bet,  
Hag a zo ganti c'hoarvezet.

Me lavaro deoc'h pen-da-ben  
E voa hi caëra femellen  
A gement a quizet da gavet!

511274

Gant ar bed oll oa enoret.

Beza oa a vrassa qalite,

Pa oa hi merc'h da eur roue;

Rag merc'h oa d'ar roue Anton,

E Constantinopl oa e dron.

Pa oa pab e Rom Sant Clemant,

Hennes a oa eus he c'herent,

E oue ebars er bed-mâ ganet

Er bloavez pêvar c'hant ha deg.

Goude an incarnation

A Jesus hon Roue guirion,

Er gêr eus a Constantinopl,

Hag estimet bras gant ar bobl.

Pa oa en oad a bemzec vloas,

He mam diganti a varvas,

Ma fallâs dhe zad e chaouet

Evit ma vize e bried.

Mont a eure da gaout ar pab,

Hag en esper caouet e c'hrat,

Evit caout e gonsantamant

Da zemezi d'e verc'h yaouanq.

Ar pab neuze pa er c'hêvas,

A meurbet en em estonas;

Ne gaffet christen var ar bed  
 A gemerre e verc'h da bried.

Gant an Iliz eo difennet,  
 Ha gant Doue eo ordrenet  
 Ne vezo james eureujet  
 An tad nag ar verc'h nepret.

E ve demezet ar verc'h d'an tad,  
 Hennes zo eur c'hrim execrabl;  
 Eur c'hrim a enep al lezen,  
 Siouas! etouez ar gristenien.

Pa en devoa clêvet Helena  
 E c'haruje sur qementmâ,  
 Var ar mor en em embarqas,  
 Hag e Flandres en em rentas.

Eno pa voa hi arruet,  
 En eun eclus en em rettet,  
 Pa oa a dost d'eun abati,  
 E commanças son ar c'hlec'hi.

Neuze an oll leanezet  
 A oue sur qer bras estonet  
 O clêvet o c'hleyer o son,  
 Hag int mont oll en orizon,  
 Hag int mont ha sellet neuze

Piou a oua erru er c'hontre ;  
 Ma remercsont eur femelen  
 A zeue d'o c'haouet pen-da-ben.

Mont a rezont e procession,  
 Gant respet ha devocion,  
 Evit monet d'e rancontri,  
 Gant eur joa vras d'e zaludi.

Ha pa velas hi aneze,  
 E voe estonet bras ive,  
 Hag oc'h o guelet a vanden  
 O tont d'he rancontr evellen ;

Neuze e recevjont anezi,  
 Ha conduet d'an abati,  
 Rag guelet a rent oll certen  
 E carre an Aotrou souveren.

Mæs ne chommas qet pell gante  
 Ne chanchas timat a gontre ;  
 Ha rag ar roue Catebron,  
 Eun den cruel ha diræzon.

Mont a eure voar bord ar mor  
 Evit savetei e enor,  
 Ha ma pedas merdaidi,  
 Mar plich geneoc'h va ambarqi,

Eun dra derrubl a arruas  
 Pa voant e creis ar mor glas ;  
 Rag an dud oll a oa lazet  
 Gant ar c'horserien arrajet.

Exceptet Santes Helena,  
 A oa eur femelen ar gaera ;  
 O sonjal caout e guerc'hdet,  
 E oa hi ganto rezervet.

En orazon en em laqas,  
 Da Jesus en em recommandas ;  
 M'ho ped, va Jesus, va Roue,  
 Conservit va virginite.

Pa oa achuet he feden  
 D'hor Zalver Jesus evellen ;  
 Eun tan eus an en a gouezas,  
 Al lestr hag an dud a losqas.

Hi oa prezervet gouscoude  
 Sant euz planqen eus he bue ;  
 Ech erruas e rivier Sign,  
 E qichennic bord eur jardin.

Ar rivier yê bete Londres,  
 Hag eno e voa eur verjes,  
 Hag eur feunteun gaer a gavas ;

En e c'hichen e tisquizas.

Ar roue Heri e guelas  
Ebars en eun dristidigez vras,  
Azezet e c'hars ar feunteun,  
Ha ne voa den en e c'hichen.

Tostât a ras neuze outhi,  
Hag e c'houlennas diganthi:  
Livirit din prezantamant  
Pe a lec'h oc'h, merc'hiq yaouanq?

Me a zo eus a Constantinopl,  
A gerent pinvidic ha nobl,  
Hag a zo amàn achapet  
A dre daouarn ar barbaret.

Allas! va c'halon a fazi em,  
Rag naon emeus, ne allàn mui:  
Pell bras zo n'emeus debret tam,  
Ha va c'halon em c'hreis a rann.

Ar roue Heri pa e c'hlêvas,  
D'e omonier a gommandas  
Monet pront da gerc'hat dezi  
Peadra evit e zoulaji.

Neuze én e c'hassas gantâ  
Ebars en e dy da loja.

Hag o tont de recommandi  
Evel eunan a dud an ty.

Goudeze oant demezet,  
Souden e oue grêt an euret.  
Hag ar fest a badas gante  
Bete an nombr a vgent de.

Daou vloas antier ez int bet  
En o flijadur assuret,  
Qen ua zeuas da veza brazez,  
Neuze e devoa goal vuez.

Digant e vam ar rouanez  
E devoe cals a baourentez,  
Hervez ma raport an histoar  
E devoe cals eus a c'hlaç'har.

Ar roue Heri a yas timat  
Da gaout an tad santel ar pab,  
Evel ma en devoa recommandet  
D'ar gombat ouz ar sarazinet.

Lezel a ras sur e secret  
Tri merq er gær eus e gachet:  
Rei a ras unan da Helena,  
Un all da Vari Cloestra.

An drede ivez a roas

D'ar c'hont a oa e vignon bras,  
 Da behini e recommandas  
 E bried gant affection vras.

Glac'har vras a oue er pales,  
 O lavaret adien assambles,  
 Hag epad eiz vloaz varnugent  
 N'en em velimp sur e nep hent.]

Helena e devoa ganet  
 Daou vugel a oa caer meurbet;  
 He mam-gaer a roas da gredi  
 Penaos e devoa bet daou gi.

Ar roue Heri pa glêvas,  
 A oue sur estonet bras,  
 O clêvet e devoa ganet  
 Daou gi evelse e bried.

Neuze e voe hi condaonet  
 Da gaout he brec'h deo troc'het.]  
 Hag amaret he bugale  
 Unan dezi a bep coste.

Ambarquet oue var ar mor bras,  
 Ebars e Breiz e tisqennas:  
 Ar barq en devoa hi digasset,  
 Da Londres a re'tournet,

Cri vize ar galon na ouelze,  
 Oc'h e guelet nep a vize,  
 O rei he divron d'he bugale  
 Hag hi prest da vervel digante.

Da gousquet neuze en em laqas,  
 Daou leon eus ar forest a zeuas,  
 A gassas gante an daou yugel  
 Qement-mâ certen oa cruel.

Eun ermit a voa neuze er c'hoat,  
 Ha diouz ar c'hri a zeuas timat,  
 Hag a gavas an daou yugel  
 Etre griffon daou leon cruel.

Unan al leon a hanvas,  
 Egile ar vrec'h a c'halvas:  
 O daou e voant gantâ maget  
 Epad c'hoezeg vloas assuret.

Ebars epad an amzer-mâ,  
 Eouc e Naonet Helena,  
 Hag eun hostizez a gavas,  
 Truez outhi a gemeras.

Chom a eure da zervicha,  
 Ebars en ty oa an distera;  
 Disprizet voa gant pep hini,

Laqêt voa da dorcha listri.

Ober a rê gant dilijanç,  
 Hep na rebel na repugnanç,  
 Qement a ordrenet dezi,  
 En o grê oll hep contraigni.

Guelit an greg eur roue  
 Carget demeus a baourente,  
 Rentet qen humbl ha qen izel  
 Dirag ar bed universel.

Sellit brêmâ an humilite,  
 Honnes a blich bras da Zoue,  
 Rag an humbl a zo exaltet,  
 Hag ar superb zo discaret.

Ar roue Heri distro a Rom,  
 Ha gant ar roue Anton,  
 A arruas en e bales  
 Ebars er gêr eus a Londres.

Allas! eno pa erruas,  
 Ar c'hont Clocester a gavas,  
 Ha goulen neuze digantâ  
 Peleac'h voa eat Helena.

Nao messenger a oa digasset  
 Dirag ar roue da lavaret

O devoa digasset peb a lizer  
D'ar c'hont Clocester a dra sclær.

Mæs eun all a zeuas goude,  
A lavaras ar virione,  
Penaos e voa bet trahisset  
Gant ar rouanez cos assuret.

Ar rouanez cos zo condaonet  
Da veza en beo losqet,  
Abalamour ma e devoa  
Laqet trêchi brech Helena.

Me lavaro deoch ar recit  
An daou vogel hag an ermit.  
Ha penaos voa an disparti  
Ebars er c'hoad gant cals a gri.

Felix a yas var bord ar rivier  
Da bourmen gant e zaou vogel:  
Amàn, emezàn, o qivis,  
Genén d'am zy o tigassis.

An daou vogel a respontas  
D'an ermit outo pa gomzas:  
N'en dê qet c'houi-ta, ermit-mat,  
Eo a zo a dra zur hon tad?

An ermit neuze a lavaras

Déze gant tristidigez vras :  
 Allas ! m'ho cavas amàn lêzet .  
 Gant ar bleizi ha leonet .

Ha gant truez m'ho tigassas  
 Ho taou genén d'am ermitach ,  
 Hag emeus ivez ho maget ,  
 Hoc'h elevet hag instruct .

An daou vugel a lavare  
 An cil d'egile aneze :  
 Pa n'en dê an ermit hon tad ,  
 Deomp-ni brémàn da glasq hor mad ,

An ermit a oue trist meurbet ,  
 Pa o chlêvas o lavaret  
 Trajont , allas ! da glas o mat ,  
 Pa ne oue an ermit o zad .

Pa voant o tiscours avelse ,  
 Erruout merdaidi ene :  
 Bremâ ez eus c'hoerrec vîbe  
 Et legezomp amâ Helena .

Gant anqen vras digonsolet  
 D'e daou vugel e doa collet ,  
 N'e devoa brech nemet unan  
 Pa zicour daou vugel bian .

Neuze e lavaras Martin :

Brice, va breur, decomp bete'r fin,  
Elêc'h ma plijo gant Doue hor c'hass,  
Ma cavimp hor mam eur vech c'hoas,

Merdaidi, ni ho supli,  
Plijet geneoc'h hon ambarqi,  
Ma zaiimp, en hano Doue,  
Da glasq hor bro hag hor c'hontre.

Ar merdaidi a respontas  
D'an daou vugel pa o c'hlêvas :  
Deut en hon lestr hag ambarqet,  
Ni ho laqai en douar assuret.

En Allemagn ec'h arrujont,  
Hag arc'hant dezo a rojont ;  
Ouspen e rojont da leina  
D'an daou vugel gant cals a joa.

En Baviere pa voant arru,  
E zejont o daou a ru da ru,  
Ma o guelas ar rouanez  
Ebars er ru eus e falez.

Ma commandas d'he messenger  
Mont da gerc'hat an daou vugel ;  
Rag qer caer oant evcl an de.

Clorianda o admire.

Digasset oant neuze dirazi,  
Roet voa deze da zebri :  
Neuze evel tud affamet,  
Ne squizent o tebri ho boued.

Re hir ven ma conten antier  
Ar brezel voa er bro Bavier;  
Mes beza voant victorius  
An deou vugel dre c'hraç Jesus.

Martin a voa eun den vaillant,  
Hag ebars er gombat sanglant  
Laza a ras ca's a zarazinet,  
Ha cals eus an turqianet.

An Itron Varia Boulogne  
O zicouras en deiz-se,  
Hag evit caout ar victoar  
Dre c'hraç Jesus var an douar.

Da Dour e teujont ac'hane,  
Eur gar a zo en Tourene,  
Sant Martin a voa omonier  
Da rei soulach d'ar beorien qer,

O mam ivez a erruas  
En Tour gant eur baourente vras.

Pa voa **Martin** o tistribui  
An aluzen da bep hini.

Goulen a eure diouti,  
Pa deuas da zellet outi,  
Pe a leac'h oc'h-hu deut amâ?  
C'houi n'en d'oc'h qet eus ar vro-mâ.

Commanç a ras neuze e galon  
Da zonet d'e biqat qen don,  
Neuze e teuas sonch dezâ  
Ebars en e vam **Helena**

Diagent en devoa clêvet,  
Evel ma hon eus rapportet,  
E voa troc'het eur vrec'h dezi,  
Hag én dont da zonzal enni.

Neuze en em anavejont,  
Gant joa vras en em zafudjont;  
Aotrou Jesus, eme **Helena**,  
Va bugale gæs a velân.

Ne zeziren qen evit mervel,  
Nemet guelet va daou vugel:  
Aotrou Jesus, Roue d'an **Trôn**,  
Homàn zo consolation  
Da eur vam e devoa collet,

He daou bugel e deus cavet.

Adieu, emezi, va bugale,  
 Mont a ràn bremàn en han' Doue,  
 Ho pet ac'hanon sonch ha memoar,  
 Va bugale ger, var an douar.

Mem bezo sonch ac'hanoc'h ive  
 Pa vin e rouantelez an èn,  
 Evit ma vezimp oll assambles  
 Er barados gant an æles.

FIN